

# Ar hoz pod youank koz

1

Chomet a hon da gonzan, nonket hoas dimezet  
Rak vid-ze onn guelet fall gand an dimezelet  
Mes a re a zo breman neit ked oll deuz ma hoant  
Setu aze evid petra ounn chomet den youank.

2

Ar merc'hed a oa guech all a glaske labourat  
Kannan guenn ar rochedou, ober stamp ag griad  
Med a re a zo breman a zo glaske bezan kouant  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

3

Dre ma heint bed pell ar skoll a tiski ar galek  
Kozeal, len ag skrivan evelt avokadet  
Da labourat a kredan na deint ked kalz a hoant  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

4

Rak diad dez ar haeran rekeit all da gavet  
Eur roben brodet gant zei ag eun tog alaouret  
Na vo ked pell a tigass eur mil lur da bemp a kand  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

5

Eur zall ag eur piano eur gambr ker da gousket  
Hoaz na brizou ked memez skubou a netat hi hambr  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

6

An tad avo ar parkou dindan en oll amzez  
Ag en dimezel youank chomou bepred ar ier  
Da lenn zon ar piano pezh hini nevez hoant  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

7

Mar guémer eur veredi rek komer eur vatez.  
Da horau, da ribotad, da gass ar zaout a mez  
Kar ar vech na brizon ked laket i zred ar vank  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

8

Pa hefed da goseal gand an dimeselet  
Delhet o tog en ho torn, o horf hanter blégued,  
Ag bezan hoas eur goguez goude poked a hoant  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

9

Evid besan eur heran aotrou, kemered eur liviten  
Eun tog fons hir oar an penn, oar o piz eur oalen.  
Ag ober hor bern ardou vall evid plijoud da Fand  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

10

Pa vo ar pardon ar vro hei an noz da zansal  
Kleved a vo a hoarzin ag i zreid a strakal  
Nezed na do ked aouenn da lampad kreiz ar vank  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

11

Pa arru ar vec'h ar ier en dud a vo kousket  
An tad a hurveo stard, ar vam a vo nec'het  
Nezeint va kleved Jeannik vanned dousik di hambr  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

12

En de varlerc'h a chomou pad an de ni guele  
Gand an droug en hi diouar pe boan en hi hoste  
Kar greis a oa a tansa a na tapet eur lamp  
Setu aze vid petra ounn chomet den youank.

13

Breman me vo guelet val gand an dimezelet  
Koulskoude ar wirionne deze meus lavaret  
Markarfeiz bezan furoc'h ag espern ho arhant  
Neze vo guelet nebetoc'h a goz potred youank.